

# IMBOURC'H

Kelaouenn Emglev An Tiegezhioù niv. 70 Meurzh-Ebrel 2011 Priz : 2,5 €

## Un euzhvil a lestr

Warlene e voe skingaset, war *History Chanel*, un teulfilm deurus-kenañ, bet savet e Miz Meurzh 2010, Penndudenn ar film ne oa ket un dremmour pe un dremmourez vrudet, nann, un dra all e oa : ur vag, ul lestr bras-kenañ, bras divent, un euzhvil a lestr ! Ne oa ket lestr tasmant ar *Flying Dutchman*, hervez ar vojenn anavezet, hogen, gellout a rafe ervat lakaat meur a hini da ober gwallhuñvreoù.

Anv al lestr : *Emma Maersk*, perc'hennet gant ur gompagnunezh-vor danat, o labourat hepken evit bastaduriñ<sup>1</sup> ar c'hevredad amerikad ha liesvroadel *Walmart*<sup>2</sup> unan eus brasañ chadenn gourmarc'hadoù ar bed, gant marc'hadourezhioù liesseurt kenderc'het evitañ e Sina.

Hiroc'h eo al lestr eget un douger-nijlistri<sup>3</sup> amerikad a zo 5000 den en e vourzh. Gant 65 metr a ledander ez eo re vras evit tremen dre ganol Panama hag hini Suez evel-just. Savet eo bet al lestr diwar bemp tamm bet skarvet war-neuñv. Uheloc'h eget ur savadur dek solieradur eo ar pont-gourc'hemenn. Bez' e c'hell 1500

endalc'her bezañ dezouget gant hevelep lestr, ha n'eus nemet trizek den o vleinañ an euzhvil-se.

Bez' e c'hell dezougen marc'hadourezhioù adreuz ar Meurvor Habask dindan pemp devezh hepken ! Ne ra merdeadenoù nemet adreuz ar Meurvor-se, d'un tizh a 31 skoulmad ( $\approx 60$  km/eur). Degouezhout a ra ar marc'hadourezhioù dezouget gantañ pevar devezh a-

raok ar re bet degaset gant ur vag voutin (18/20 skoulmad tizh,  $\approx 35$  km/eur), etre Sina ha Kalifornia. Nav gavr a c'hell arc'hwelañ war-un-dro, a-benn diskargañ al lestr dindan nebeutoc'h eget div eurvezh hag ez a al lestr war e giz da Sina gant an holl endalc'herioù



goullou. Ya, gwir eo ! Ne vez kaset netra en-dro da Sina. Spletus kenañ eo hevelep lestr enta evit *Walmart*, pa c'hell kenkoulz all degas bouedoù ha madoù berrbad eus Sina da Amerika. 91 % eus ar pezh a vez gwerzhet gant *Walmart* a vez kenderc'het e Sina, n'eo ket souezh ma kaver kement a "Vade in China" e Norzhamerika (evel en Europa). Bez' ez eo an *Emma Maersk*-se unan diwar an tri lestr eus ar seurt-se a zo e servij evit poent, ha daou all ez eus war ar stern, da vezañ deroet e 2012.

Goude bezañ arvestet ouzh ar film-se e chomer un tammig sabatuet, saouzanet, hogen hor sebez a zo un tammig evel spont ar vugale rak ar bleiz

<sup>1</sup> Bastaduriñ : *approvisionnement*.

<sup>2</sup> Wal-Mart stores, inc. ent-kefridiel ; diazezet gant Sam Walton, a zigoras kentañ stal e chadenn dasparzh e Rogers en Arkansas USA e 1962.

<sup>3</sup> Douger-nijlistri : *porte-avions*.

: keit ha n'o deus ket gwelet al loen... rak deuet eo an traoù da vezañ peuzheñvel en Europa ; emañ an hevelep saviad bemdez dindan hon daoulagad hag abaoe pell : ne c'heller prenañ skingomzer, skinweler, urzhiatorell ebet, pe n'eus forzh petore gwikefre derc'hel-ti, pe gwikefre en em fichañ, ha kement-all evit ar gwiskamantoù a bep seurt ha kalz bitrakoù ha bravigoù a dalvoudegezh dister, ha ne vefe ket peget warno ur skritell "*Made in China*" pe hini ur vro e Gevred Azia. En abeg d'ar priz izel e vez prenet an traoù-se gant an dud er gourmarc'hadoù, hep soñjal pelloc'h ez eus tud dilabour en hor broioù, hag ez eo bet laeret o labour gant ar c'hevredadoù liesvroadel-se.

Petra ober neuze, diaes eo respont d'an atersmañ, gant ar bolitikerion emañ ar respont, int eo a zo atebek war se, rak evit pezh a sell ouzh an dud er c'heñver-se, asantet o deus distrivant ha tamm-ha-tamm, da veur a dra, ha da gentañ-penn da vezañ hoalet gant bruderezh kevredadoù an dasparzh a doue o holl zoueoù ne glaskent nemet difenn galloud-prenañ an arvalion gant o frizioù izel, hogen ankounac'haat a raent ez eo ret d'ur prener gounit arc'hant gant e labour dezhañ evit gellout prenañ. Tud 'zo a soñjfe ez eo ar saviad-se evel hini un den a droc'hfe ar skourr emañ azezet warnañ, hogen gant *Walmart* ez eus a bep seurt stalioù, betek an hini dilorc'hañ e-lec'h ma vez gwerzhet traezennoù traoñ-diriad<sup>4</sup> evit rastellat memestra arc'hant ar skorennoù roet d'an dud dilabour. Hag arabat ankounac'haat e c'heller digeriñ gourmarc'hadoù all en holl vroioù ar bed a-benn gounit arc'hant.

Gant *Walmart* hon eus ur skeudenn sebezus a-walc'h eus ar pezh a vez aozet deomp gant ar vedelouriezh : ar gevredigezh varc'hadourel a zistruj ar broadoù war-lerc'h bezañ bet diskaret an harzoù a vevenne he zachenn hemolc'h, hag a-dreñv dezhi ur ouenn disheñvel a bolitikerion,

<sup>4</sup> Traoñ-diriad : *bas de gamme*.

hollc'halloudek, o devo ar wech-mañ ar bed a-bezh da ren diharzveli, dorn ouzh dorn gant ar gelliderion<sup>5</sup> vrasañ... pe dindan o urzhioù.

Ne vez ket lavaret traoù all – gant gerioù all avat – gant un teulfilm amerikan all : *Wal-mart, ramz an dasparzh*, gant Rick Young hag Hedrick Smith (2004) a ra gant *Walmart* un gudenn-skol<sup>6</sup> war heuliadoù kevredigezhel hag armerzhel ar gealiadurezh nevezfrankizour<sup>7</sup> e-par ur vro a-bezh (Stadoù Unanet Amerika). Diskouez a ra peurgetket penaos eo bet rediet an darn vrasañ eus pourvezerion *Walmart* da zilec'hiañ o c'henderc'herezh da Sina a-benn doujañ da roll an diferadurioù<sup>8</sup> darvennet gant *Walmart* e keñver ar prizioù, pezh a zo bet pennkaoz d'un digempouez bepred bras-ouzh-bras e gounid Sina en eskemmoù armerzhel etre Sina ha Stadoù Unanet Amerika (un divigad a 200 miliard \$ bep bloaz), hag hogozik treuzfurmet Stadoù Unanet Amerika en ur vro eus an Trede-Bed, ezporzhier danvezioù krai hag enporzhier kenderc'hadoù pleusket<sup>9</sup> a galvezoniezh<sup>10</sup> uhel. Evel-se, en un doare ameeun, en deus *Walmart* rivinet un toullad mat a gêrioù bihan en Amerika, diberc'hennet diouzh o ijinerezhioù hengounel, ha dre heulret, emañ un darn vat eus poblañs Amerika war baouraat didrugar.

## Donwal Gwenvenez

*Trugarez vras da Domaz Jacquet en deus savet ul "luc'hskeudennaoueg" gant addisplegoù e brezhoneg, troet diwar saozneg an teulfilm, ha ma zo bet tennet elfennoù 'zo anezhañ da sevel ar pennad-mañ.*

<sup>5</sup> Kellider : *financier*.

<sup>6</sup> Kudenn-skol : *cas d'école*.

<sup>7</sup> Nevezfrankizour : *néolibéral*.

<sup>8</sup> Roll an diferadurioù : *cahier des charges*.

<sup>9</sup> Kenderc'hadoù pleusket : *produits manufacturés*.

<sup>10</sup> Kalvezoniezh : *technologie*.

## An Islam, al laikouriezh c'hall hag an Emsav 2/2

### Ar Republik a zo evel ur bern greunennoù traezh disneuz.

Ar gevredigezh kozh, organek (kenaozek), aozet gant tiegezhioù ha gant frammoù etreat, oc'h ober evel-se ur gwiad liesseurt ha gant un

urzhaz, a zo lakaet en he lec'h ur bern greunennoù traezh disneuz, heñvel an eil ouzh ar re all. Greunennoù traezh a vez graet hiviziken anezho bugale un distrihadur hollvedel anvet Republik.

‘Nasion’ eo bet anvet ar bern traezh distumm-se. Evit klask reiñ dezhañ ur stumm bennak ez eo bet termenet ivez evel-henn : « Kumuniezh Vroadel ». Kement-se e lec’h ne oa na kumuniezh, na broad a-raok an Dispac’h Gall<sup>11</sup> !

Hogen, gouez d’an dispac’herion, ez eo hollvedel menoziad an “Nasion”, dre maz eo Frañs mammvro Gwirioù Mab-den, a zo hollvedel o-unan. Eno emañ talvoudoù ar Republik. Setu aze perak e veze roet da vare an Dispac’h ar vroadelezh c’hall d’an holl estrañjourion a zeue da sikour an Dispac’h.

Neuze ‘ta, n’eo ket souezh e vefe roet ar vroadelezh c’hall d’an holl enbroidi, gant ma tegemerint “talvoudoù ar Republik” : diouzhtusouden e teuont da vezañ gwir C’hallaoued ! Forzh a belec’h e teuont, forzh pe sevenadur a vefe o hini : Gallaoued ez int ma prometont doujañ d’ar « *Pacte Républicain* ». Hag o bugale war o lerc’h a vo, diouzhtu, bugale ar Republik.

### **N’eo ket ar gealiadurezh republikan a lakae ar bern traezh da badout**

Ret e vo bezañ bet gortozet daou gantved evit kompren da vat petra dalvez er pleustr degemer evel keodedour kement estrañjour a zeu e Frañs da servijañ an Dispac’h. Rak e-pad pell, ne voe ket lakaet da dalvezout pennaennoù strishañ an Dispac’h. Chomet e oa ar gevredigezh evel ma oa a-raok. War ar maez, da vihanañ, da lavarout eo evit ar pep brasañ eus ar boblañs. Betek 1914 e vevas an dud evel dindan ar renad kozh : dont a rae ar vugale er bed e tiegezhioù henvoazel e-lec’h ne veze ket nagennet, e doare ebet, aotrouniezh an tad ; an tiegezhioù a yae d’ober parrezioù ha den ebet ne nac’he aotrouniezh ar person, hag all... Kristen e oa ar gevredigezh, dre vras, ha ma kendalc’he ar gevredigezh-se da vezañ ur gevredigezh ez eo peogwir e talc’he da vevañ diouzh an talvoudoù kozh. N’eo ket ar gealiadurezh republikan a lakae ar bern traezh da badout. Estren da vuhez wirion an dud e oa ar gealiadurezh republikan. Hag ar ger ‘Nasion’, an dro-lavar ‘Kumuniezh Vroadel’, o doa gwisket ur ster henvoazeloc’h, karget gant an talvoudoù a yae da ober ar gevredigezh e-giz m’edo, hini bro-C’hall an amzer-se.

Neuze, pa vez lavaret dimp e ranker ebarzhiñ an enbroidi arab-ha-muzulmat, pa weler merc’hed eus ar broioù-se o vanifestiñ o tiskouez o c’hartenn-keodedourion hag o kanañ ar

<sup>11</sup> Breizh a oa anavezet e rouantelezh Frañs, etre 1532 ha 1789, evel « *Province réputée étrangère* ».

Marseillaise, e veizer e tistroer da wir ster ar ger « Nasion » ha « Kumuniezh Vroadel », ha diaesmat eo tremen lost al leue dre c’henou an dud o lavarout ne vije ken met un istor gouel pe tchador etre an enbroidi-se hag ar Republik. Kaer ‘zo lavarout, komz eus ur « gkumuniezh vroadel » a zo livañ gevier, rak gwelout a reer mat n’eo ket gall an Islam, na brezhon e mod ebet ! An aotrou ar Bras dirak e skinweler a wel mat n’emañ ket-eñ eus ar Vroad-se a ziskouezer dezhañ : merc’hed masklet er straedoù, dirak ar skol, en ospital, er gourvarc’had. Kaer en deus ober, en em gavout a ra nec’het. Gant e zaoulagad e wel alouberezh sioul tiriad ar Republik, ha ne bad ket pelloc’h touellerezh kealiadurezh ar Republik c’hall. Derc’hel a reer da gomz dezhañ eus ar gevatalded etre ar geodedourion, hogen soñjal a ra, gant gwir abeg, n’eo ket se e wir vro.

Ha perak n’eo ket e wir vro ? Sklaer eo evel lagad an naer ! Dre ma toug ar merc’hed-se dilhad eus broioù ar Reter na glotont gant henvoaz ebet dre amañ. Dre ma komz ar re o doug yezhoù ha n’int ket na brezhoneg na galleg. Dre ma fell dezho kaout lec’hioù evit o relijion, gant minaredoù da skouer, da lavarout eo gant un tisavadurezh heñvel e pep lec’h, gwir greñvlec’hioù, ec’hon-kenañ, na glotont ket gant hor sevenadur. Breizh ha Bro-C’hall, evel Europa, a zo kristen o neuz : pep kêriadenn he deus he chapel, pep kêr he iliz, pep kroaz-hent e groaz. Netra da welout ganto. Chom a ra boud Republik ar C’hallaoued, hogen, netra nemet gant an anvioù-lec’h eo aes d’an dud respont petra ez int, ha se kalz a-raok savidigezh ar Republik. E Breizh, abaoe 1500 vloaz, ar Plouioù, Trev-ioù ha Lann-ioù diniver... Ha ne c’heller ket nac’h ez eur boaz dre amañ da zebriñ pesked d’ar Gwener, e vez graet ur gouel bras da Bellgent Nedeleg hag e vez sonet teir gwech an Anjelus. Ne c’heller ket gouzañv mouezh ar muezzin pemp gwech bemdez Doue, nann. Fedoù ez eo, hag ar Republik ne c’hell netra a-enep ar gwirvoud-se.

### **Atav e c’heller ar vuzulmaned goulenn muioc’h, en anv ar frankiz relijiel.**

En anv he laïkouriezh, ne c’hell ar Republik ober diforc’h ebet etre ar relijionoù, etre katoligiezh hag islam. Setu perak e lavaras Chirac un deiz : « *E blas-leun en deus an Islam e-touez ar relijionoù bras a zo war hon tiriad* ». Hogen mar ne ra ket ar Republik an diforc’h, an dud a ra. Forzh pegen digristenaet ez eo Frañs,

an dud a oar ez eo kristen he orin, ha n'emañ ket an Islam eus amañ. Diwar-se, an Islam ne c'hell ket kaout ar memes plas war hon tiriad. Lod a wel zoken, gwelloc'h-gwellañ, n'eo ket an Islam ur relijion, ur gealiadurezh mac'hveliek<sup>12</sup> ne lavaran ket.

Marteze e tihuno lod da heul arc'hadurioù kreñvoc'h-kreñvañ ar vuzulmaned. Ar ouel er skol, ar burka, al lieswregiezh, pa c'houlennont medisinezed evit o gwraez en ospitalioù, pa c'houlennont debrñ kig halal, pa savont teir pe beder moskeenn-vras en Naoned... Pa weler ez eus karterioù a-bezh e Breizh hag a zo dezho... Pa weler nebeutoc'h nebeutañ a gantinoù o servijañ pesked d'ar Gwener, ha muioc'h-mui a ziviz da ober hep kig-moc'h hiviziken. Atav e c'hello ar Vuzulmaned goulenn muioc'h rak en anv ar frankiz relijiel ne c'hell ket ar Republik nac'h tra ebet dezho. Betek ma vo troet ar Republik laikour en ur Republik islamek.

Ur skouer all. Betek nevez 'zo ne oa ket ar gwir da lakaat an dud da labourat da sul. Izel eo bet niver an dud o deus klemmet evit an abeg anatañ : ar Sul a zo deiz an Aotrou. Diouzh un tu all ez eus muzulmaned a c'houlenn bezañ libr da bediñ d'ar Gwener, evel maz eo erbedet gant o relijion. Anavezout a ran tud e Breizh a rank labourat d'ar Sadorn da noz ha d'ar Sul hag a zo libr d'ar Gwener. E kalz micherioù a rank mont en-dro ar sizhun-pad ez eo kalz aesoc'h bezañ libr d'ar Gwener eget d'ar Sul. Skrivet am eus uheloc'h e oa bet klasket endeo gant an Dispac'h lemel kuit an Deziadur kristen penn-da-benn, ha lemel war-un-dro ar sizhun gant he seizh devezh, gwriziennet e komzoù ar Bibl. Ne oa ket deuet a-benn. Daoust hag eñ e teuo a-benn ar Republik, an taol-mañ gant sikour an Islam, da ziverkañ kement a zo kristen e sevenadur an douar-mañ ?

### **An Islam ne anavez nemet an Oumma, kumuniezh ar Grederion.**

Kaer he deus ar Republik derc'hel da gomz gant menoziadeg ar « gKumuniezh Vroadel », ne c'heller ket nac'h emaoamp dirak emziskouezadur ur gumuniezh vuzulmat. Eveljust ez eus tud a glask reiñ da grediñ e c'hellfe ar gumuniezh vuzulmat bezañ un tamm eus ar gumuniezh vroadel, pe neuze e kouezhfemp holl e pec'hed « ar gumuniezhouriezh ». Met kement-se n'en deus ster ebet. Rak diouzh un tu ez eus ur Frañs a zo

<sup>12</sup> Mac'hveliek : *totalitaire*.

taget en he fivelezh, ha diouzh un tu all ur Republik he c'healiadurezh kamm, na anavez nemet keodedourion kevatal-mik kenetrezo, unanet gant ul laikouriezh arloupet a rank bezañ pouezusoc'h eget ar menozioù, zoken ar re relijiel. Hogen an Islam ne anavez nemet an *Oumma*, kumuniezh ar Grederion, hag e nac'h menoziad al laikelezh, forzh peseurt stumm e vefe.

Anat eo d'an holl, petore ster en deus ar ouel vuzulmat pe ar burka : nac'h al laikouriezh ha lakaat war wel an *Oumma*, an hini eo, just a-walc'h.

### **Ur gumuniezh ne c'hell ket bezañ gougevanenn ur gumuniezh all.**

En un hent dall emañ ar Republik eta. Ha ne c'hell ket mont er-maez anezhañ hep en em zinac'h. Hogen daoust hag-eñ ne c'hellfe ket ar Frañsizion o unan kavout un diskoulm en ur adkavout o gwir hennadelezh ? An diskoulm a vefe adkavout petra eo ur gumuniezh. Ur gumuniezh wirion. Un nebeut bloavezhioù 'zo e oa bet boulc'het an hent-se pa voe kaoz da anavezout ar bobl korsikat. E 1991 e oa bet klasket gant an tu kleiz anavezout « ar bobl korsikat evel ur c'hougevanenn<sup>13</sup> da bobl ar Frañsizion ». Kuzul ar Vonreizh en doa distailet al lavarenn-mañ dre maz ae a-enep da bennaennoù ar Republik. Evel-just. Hogen anat e oa a-hent-all : ur bobl ne c'hell ket bezañ lodenn ur bobl all ! Evel-se, ur gumuniezh ne c'hell ket kennebeut all bezañ gougevanenn ur gumuniezh all. Met bez e c'hellfe, marteze, bezañ ur gougevanenn eus Frañs... maz anavezfe-hi kumuniezhoù liesseurt war he ziriad, pezh n'eo ket tost da ober, henn gouzout a reomp a-walc'h.

E 1996 en doa ar maodiern Gaudin graet anv eus ar bobl korsikat, daoust ma oa bet distailet adarre an dro-lavar divalav gant ar c'hentañ maodiern, Juppé d'ar poent-hont. Anat eo d'an holl ez eus ur gumuniezh korsikat. Ha neuze, maz eus unan korsikat, ez eus unan euskarat, breizhat, elzasat, ... hag ivez unan arab-hamuzulmat. Ma vefe anavezet kumuniezhoù dibar er C'hwec'hkogn, evel er riezioù tro-dro dezhañ, kumuniezhoù gougevannet en un « Nasion » na vefe ket mui jakobinat, e c'hellfed neuze anavezout ivez bezañs kumuniezhoù ha n'int ket gougevanennoù d'ar riez « Frañs » hogen hepken kumuniezhoù estren : ar Vuzulmaned.

<sup>13</sup> Gougevanenn (benel) : *composante*.

Lod a gavo dezho em eus distaolet ar vroadelouriezh vrezhon oc'h embann kement-se. N'am eus ket. Ret e vefe termeniñ petra eo evidoc'h ar menoziad a ya gant ar ger-se, "broadelouriezh". Va broadelouriezh n'eo ket hini an "*nasionalism*" a zo diwanet e-pad an Dispac'h gall hag en deus devoudet war lazhadeg ar Vendée, hini ar Brezel Bras ha goude-se awenet Hitler ha Staline, nann. Tra-walc'h e vefe din ar ger « bro-garouriezh » ma ne vefe ket re romantel d'am skouarn. En ur em ziskleriañ broadelour vrezhon e fell din diskleriañ hepken e vefe reizh ma teufe ar Vretoned da vezañ en-dro mistri en o bro, e doare pe zoare. E stern Bro-C'hall da gentañ, peogwir emamp serret e-barzh evit poent. Setu eta, o lakaat e vefe adwelet menoziad an « Nasion » gant ar C'hallaoued, ne nac'hfen ket ober ur pennad hent ganto, kwit 'ta !

Da gentañ e vefe poent dezho chom a-sav da reiñ ar geodedouriezh c'hall da dud ha na fell ket dezho en em deuziñ e-barzh, da dud yaouank hag a zalc'h d'o broadelezh kent war-un-dro hag a ra eno o c'hoñje, pezh a ziskouez anat pe hini eo o gwir vammvro. Ra vezo anavezeta, e berr gomzoù, pezh ez int. Ur gumuniezh estren war diriad Frañs, gant gwirioù distag diouzh ar vroiz, ha n'he defe ket, dreist-holl, ar gwir d'en em staliañ dre amañ, ha kreskiñ dibaouez. Daou pe dri bloaz 'zo e oa bet gwelet Diwan o sevel a-enep servijoù ar Stad-C'hall a venne kas en-dro d'e vro un tiegezh a oa o chom e Sant-Brieg hag a oa « dibaper », da lavarout eo : *er-maez lezenn*. Skoet e oan bet gant emzalc'h Diwan, hag e skrivas d'ar renerezh da glemm peogwir e oa sañset Diwan bezañ ur strollad neptu, hervez he c'harta, genaoueg ma oan. Evel-just n'em boe respont ebet. Pezh a zo sur eo n'eo ket ar wech kentañ e verzen ur seurt emlazh politikel a-berzh aozadurioù bet lusket gwechall gant ur spered broadelour. Ne welont ket e vez komzet e Breizh muioc'h turkeg hag arabeg en tiegezhioù eget brezhoneg, daoust ma vez nac'het krenn an dra-se gant an INSEE<sup>14</sup>.

### **Republik ar bern traezh n'eo ket ar gwirvoud.**

Lod a lavaro ez eus ur bern tud a orin estren, er-maez eus Europa, arab-ha-muzulmat da skouer,

<sup>14</sup> Hervez an enklask a gaver war ar genrouedad, hag a sav da 2003 ( ! ), ne vije nemet 5000 den e Breizh-ar-pevar-departamant o c'houzout arabeg pe ur yezh norzh afrikat bennak. Digredus. Netra nemet e skol bublik e karter Pontanezen Brest ez eus ur bern bugale na glevont ket galleg er gêr.

hag a zo keodedourion c'hall. Gwir eo, met kement-se n'eo nemet un tamm paper a netra. Ma lavaront deoc'h ez int perzhiak er gumuniezh arab-ha-muzulmat, neuze n'int ket evit en em deuziñ er bloc'had gall. Gouzout a reer ouzhpenn-se ez eo enket mat ar mekanik da enteuziñ abaoe... daou-ugent vloaz, memestra ! Ur pennad brav a amzer eo : poent eo digeriñ an daoulagad ha plediñ a-zevri gant ar gudenn.

Tud 'zo a lavaro ivez ne reer amañ nemet kinnig ur seurt is-dezvad d'an dud a orin muzulmat, heñvel a-walc'h ouzh hini an Dhimmied. Un diforc'h bras ez eus : ar Gristenion er broioù muzulmat a oa en o bro paz eo en em gavet relijion ar profed Mohammed. Ouzhpenn-se, an dezvad a vefe roet d'ur gumuniezh estren a Vuzulmiz war ur riez europat a ranko doujañ, evel-just, da Wirioù Mab-den, pezh na reer ket e hini ebet eus ar broioù anavezeta evel muzulmat.

Gouzout mat a ran n'eo ket doujus seurt prezegerezh ouzh pezh a anvet « talvoudoù ar Republik ». Met Republik ar bern traezh n'eo ket ar gwirvoud. An holl bobloù a glask mirout o hennadelezh : reizh eo. Evidomp-ni Bretoned e vefe un dra vat ma vefe anavezeta ent-gwirion bezañs kumuniezhioù dibar war diriad ar riez c'hall. Ret-mat e vo d'ar riez c'hall adwelout he damkaniezh.

### **Krouiñ liammoù startoc'h etre an tiegezhioù brezhonek.**

Ret-mat e vo d'an ensavadurioù eus emsav ar brezhoneg adkavout un tamm skiant a-benn krouiñ liammoù startoc'h etre ar vrezhonegerion, d'ober ur gwir gumuniezh. An dra-se a ra diouer bras. Pet skoliad bet desket mat brezhoneg gantañ pe ganti, ne zalc'hont ket d'ar yezh diwezhatoc'h, hag abalamour da betra ? Sur a-walc'h ez eus kalz a abegoù, hogen unan ez eus, sur : n'eus ket a wir gumuniezh. Ar genrouedad, ar gouelioù hag ar c'hazetennoù ne c'hellont ket kempouezañ ar mank groñs a diegezhioù brezhonek hag an dister maz eo an darempredoù kenetrezo. Pal Emglev An Tiegezhioù, bet savet e 1949, a zo, dres a-walc'h, aesaat an darempredoù etre an tiegezhioù brezhonek. Betek-henn n'eo ket bet klevet. Hogen arabat fallgaloniñ : ne c'hell ket bezañ gwashoc'h !

**Yann Maneguen**

## Ar Gevredigezh Reizh

An deiz all e oa bet goulennet diganin pehini e oa ma doare da veizañ ur gevredigezh reizh. Diouzh ur sellboent norzhamerikan, pleustrelour e oa bet graet ar goulenn, kentoc'h eget gresian-roman : da lavaret eo e felle d'am genembregerion gouzout hag-eñ em boa un danvez-raktres politikel bennak er par-se. Er ster-se ne ouzon ket petra eo ur gevredigezh reizh : peursur ma'z on n'eo ket ma labour degas seurt tra ken dispar d'ar bed, n'on ket dedennet gant sevel raktresoù ne gasin ket da benn.

Dereout a ra din avat studiañ keal ar "gevredigezh reizh" diouzh ur sellboent gresian-roman : gwelout hag e klot ar gerioù gant ur gwirvoud bennak, hag ez eus un dalvoudegezh bennak gant ar gwirvoud-se.

Reizh pe zireizh n'eus nemet ar boudoù gouest da oberiañ a c'hall bezañ, anat. Un den a c'hall oberiañ, un embregerezh a c'hall oberiañ, ur strollad politikel a c'hall oberiañ, ar "gevredigezh" avat, peurleun ma'z eo, ne c'hall ket. War ur mennad unan eo diazezet forzh pe ober, ha kevredigezh ebet n'he deus en he c'herz a-walc'h a unded evit ma vefe diskouezet evel abeg fetis d'un ober bennak. Ar gevredigezh n'eo ket un oberer, danvez-krai da viliadoù a obererion, ne lavaran ket. An hollad obererezhioù disheñvel-se a grou disoc'hoù na glotaont ket penn-da-benn gant mennadoù orin an obererion, nebeutoc'h c'hoazh gant mennad ur boud holladel anvet "kevredigezh" !

Disklaereded kentoc'h eget sklerijenn a vez degaset gant an droienn "kevredigezh reizh" neuze. Un doare da gaozeal eo, dezhañ dre ret meur a ster a vesk an eil gant egile en ur skoulmad diziluziadus, ha kement-mañ a zo a-walc'h evit displegañ perak e vez graet an direizhderioù gwashañ gant ar re a c'hourbann oberiañ en anv ar "gevredigezh reizh". Pa gemerer evel-se un doare-da-gaozeal evit ur c'heal gwirion, pa glasker krouiñ un dra na c'haller ket lavaret zoken petra eo, bewech e teu un disoc'h disheñvel-mat diouzh ar pezh a oa en dec'hmeg. Gouel ha skrignerezh-dent a vez pa zegouezh an disoc'h-se ; padal e tec'h an oberer peurliesañ rak ar retvez da dalañ ouzh e gablusted, o terc'hel pennek evel ur c'hrank d'un diskleriadenn mennadoù mat, a zo a-dra-sur ar gwellañ louzeier-kousket evit ar c'houstiañsoù

digas, peogwir ne glotont gant keal resis ebet just-a-walc'h.

Ma ne c'hall ket ar gevredigezh, drezi hec'h-unan, bezañ reizh pe zireizh, e forzh pe kevredigezh ez eus a bep seurt obererion a c'hall, int, oberiañ reizh pe zireizh. Ma'z eus ur ster solut bennak gant an droienn "kevredigezh reizh", e rank bezañ anv d'ur gevredigezh ez eus enni binviji evit hepkoriñ<sup>15</sup> an direizhderioù pe difaziañ anezho pa ne c'heller ket tec'hout diouto. Ur gevredigezh reizh a zo ur gevredigezh e c'haller labourat enni evit ar reizhded, a-benn-ar-fin. Galloud a ranker kaout avat, evit kas da benn al labour-se. Al lezenn a rank harpañ ar galloud-se, evel-just, met n'eo ket a-walc'h : ma n'eus ket a hentoù sevenadurel pe armerzhel evit lakaat ar yonez da dalvezout, bezañ "harpet gant al lezenn" ne zegas ket kalz tra. Kuit d'an droienn "kevredigezh reizh" da vezañ ur glinkadenn c'houllo d'ur yoc'had torfedoù, e ranker kaout galloudoù liesseurt ha puilh strewet e pep lec'h e-lec'h bezañ tolpet etre daouarn ur bihanniver sklerijennet pe chañsus. Met ma n'eo ket gouest ar boblañs da grouiñ ar galloudoù drezi hec'h-unan ha ma fiz ar gefridi-se en ur strollad dispac'hel a bromet adlodennañ ez-demokratel ar galloud unan, en degouezh-mañ eo e teu ren an direizh evit mat. A-raok lodennañ galloudoù e ranker da gentañ perc'hennañ anezho : an danvez-tredeog-lodennour a rank da gentañ dastum an holl c'halloudoù ennañ e-unan. Na pa zalc'hfe d'e c'her, e kendalc'ho an holl c'halloudoù d'en em greizennañ ennañ muioc'h-mui, netra nemet peogwir eo e gefridi lodennañ ar galloud.

Gwir c'halloudoù ne c'hallont ket bezañ kemeret, na roet, nag amprestet : krouet, ne lavaran ket. En degouezh kontrol, n'int ket galloudoù : n'int nemet arouezioù galloud, a servij da guzhat an diouer hag ar rouezded a c'halloud gwirion. Neb ne c'hall ket krouiñ galloudoù drezañ e-unan ne vo morse netra muioc'h eget sklav al lodenner.

An droienn "kevredigezh reizh" ne c'hall klotañ ez-kempoell neuze nemet gant ur bobl leun a intrudu, dezhi obererezh dieub, liesseurt, orinel a-walc'h evit bezañ didizhadus da evezherezh

<sup>15</sup> hepkoriñ : *éluder, faire l'économie de...*

forzh pe vegenn e vefe, renerion gozh war an diskar pe dispac'herion o klask war-lerc'h hollc'halloud.

Ar re a glask dieubiñ evit gwir o bro diouzh yev ur vegenn bennak ne brometont morse kemer ar galloud digant ar vegenn-se evit lodennañ anezhañ etre ar bobl : e-lec'h-se e klaskont dieubiñ an holl nerzhioù-krouiñ morgousket e spered ar bobl, peadra da homañ deskiñ krouiñ he galloudoù piaouel, niverus, liesseurt, dirakweladus, a lak holl raktresoù ar vegenn da

deuziñ ha da vezañ euvret, a-raok m'he defe homañ amzer da gompren ar pezh a zo o c'hoarvezout.

## Olavo de Carvalho

Brezhoneg gant **Ewan Delanoy**, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *A Sociedade Justa*, niverenn an 10 a viz Meurzh 2011.

## Pevarzek vloaz e oan

Bep daou vloaz ez aemp da Bariz da di va zud-kozh a-berzh va mamm evit Gouel Nedeleg. Chom a raemp un nebeud devezhioù er Gêr-Gapital. Va mamm-gozh Marie-Antoinette Cottenet, Dufour e anv plac'h yaouank, a lakae ac'hanomp da weladenniñ kreiz-kêr Bariz. Evel-se em eus bet tro da anaout mat a-walc'h ar gêr vras-se, bras-tre evidomp-ni Bretoned. Soñj am eus ne ehane ket va mamm-gozh d'ober meuleudi d'ar gêr-vras, kêr he c'havell, kêr he buhez. He zad a oa bet mignon Gustave Eiffel, ha sevel a rejomp en tour-se, evel-just, hag e raen goap ouzh ar berniad houarnaj merglet-se ma oamp o chom tostik outañ. Diskouez a reas dimp mirdi al Louvre, a gavis torr-revr, respet deoc'h : ne oan nemet ur bugel. C'hoazh e tiskouezas dimp Palez "*les Invalides*" ha chapel Sant-Loeiz-ar-C'hallaoued a zo tre e-kichen.

An deiz maz ejomp d'an *Invalides* e tiskouezas dimp hor mamm-gozh bez Napoleon Kozh, ur bez bras, o sevel diouzh un toull bras, kelc'hiet gant ur savadur savet a ratozh : enlouc'het eo evel-se em memor a vugel. Dalc'het 'm eus soñj eus daou dra : an dra gentañ eo e pedjomp "*evit Bro-C'hall*" e harz bez Napoleon. An dra-se n'en doa ket plijet din, tamm ebet, n'eo ket a fed pediñ, eus an dra-se e oan boas, hag a raen a galon vat emskiantek ma oan eus va stad a bec'her, met pediñ evit Bro-C'hall, ar wech kentañ e oa din klask ober, war c'houlenn ma mamm-gozh. Ne gav ket din e vefe bet devot-tre ar bedenn-se. Goude-se ez ejomp tre e chapel sant Loeiz. Ar bannieloù eus an armeoù gall, leun a bouldrenn, lous ha pilhaouek, a oa staget e lein ar chapel. Ar c'hristen bihan ma oan a gavas divalav e vefe bet aotreet bannieloù a vrezel e ti an Aotrou Doue.

Buan e voen brouezet gant kement a valeadennoù diziwezh, enoeüs ha skuizhus

evidon moarvat, kement ha ken bihan ma kemeris abeg eus an emskiant vihan am boa eus va brezhonelezh evit enebiñ ouzh ma mamm-gozh, Doue d'he fardono, hegaset ma oan ganti, dre ma seblante din azeuliñ Bro-C'hall betek re.

Un nebeud bloavezhioù war-lerc'h, aet da Bariz adarre evit Gouel Nedeleg, e oa gwashoc'h-gwashañ ar vrouez am boa evit "*Bro-C'hall*". Ar Vro-C'hall-se a oa dreist-holl ar pezh a veizen anezhi diwar va gweladennoù e ti va mamm-gozh e Pariz, ha ne blije ket din. Eorizhet<sup>16</sup> am boa baradozig Keraskoed ha Breizh izel, am boa graet bro va c'halon anezho, ha me o chom e Breizh uhel koulskoude, e Sant-Brieg.

Ha neuze e c'hoarvezas un darvoud a lakaas va galvadenn a stourmer brezhon da vezañ dizistro. E miz Kerzu 1975 e oa. Va mamm-gozh a c'houlennas ouzhin mont da brenañ bara er straed Suffren, tre e-kichen ar straed Charles Floquet e-lec'h m'edo o chom. Mont a ris laouen, hag e c'houlennis ouzh ar boulañjer "*ur varaenn daou lur*" evel e oan boas d'ober e Sant-Brieg. Sellout a reas ouzhin hag e c'houlennas eus a belec'h e oan. "*Eus Sant-Brieg*", emezon. "*Ur Breizhad, pe ur Gall ez out ?*".

Skodeget e voen gant ar goulenn. Prim ha sirius e respontis dezhañ : "*Breizhad on !*", hag eñ da vousec'hoarzhin ha me da zistreiñ d'ar straed Charles Floquet. War an hent e prederiis, ar varaenn dindan va c'hazel, oc'h en em c'houlenn perak 'ta en doa savet ar goulenn iskis-se, ha perak em boa respontet evel-se. Meizañ a raen e oa un dra bennak amjestr ennon en doa va lakaet da respont, lorc'h ennon, daeüs, ne oan ket eus o gouenn. Merkañ a ris ivez e

<sup>16</sup> Eorizhet : *idéalisé*

ranken bezañ poellek, rak “*ur gwir Brezhon a rank gouzout brezhoneg*”, emezon din-me vunan o tigorntroiañ war ar straed Charles Floquet.

Ur wech distroet d’ar gêr e krogis en ul levr am boa merzet e levrroueg hon ti : “*Le breton par l’image*” gant Visant Seite<sup>17</sup> hag e ris va-unan an div gentel gentañ. Ne ‘z is ket pelloc’h : n’am boa ket youl a-walc’h evit-se, pa ne oan nemet a-vec’h pevarzek vloaz... Met divizet e oa da vat : deskiñ brezhoneg a rafen.

D’ar mare-se e oa trouz er meziennou gant gwalldaolioù an FLB hag an dud nevez-

<sup>17</sup> “illustrations de Moriss, Edition d’Olole et de l’Urz Goanag Breiz, Landerneau (Bretagne)” e liv, miz genver 1944.

dibrizoniet e miz Kerzu da heul ur gwalldaol a-enep d’an Aotrou Fréville, maer Roazhon, n’eo ket sur e vefe bet sevenet gant emsaverien. Abalamour da se e kav din bremañ edo ar boulañjer oc’h ober dave d’an darvoudoù-se, hep gouzout din. Bezet pe vezet, an arroudoù bihan-mañ, c’hoarvezet pell diouzh Breizh, a atizas ar gleizenn a oa em askre, ar santadenn “dour yen – dour tomm” a ziwasken abaoe pell hep bezañ emouez outi, o vont, gwech da Barizar-C’hallaoued, gwechall da Geraskoed-ar-Vrezhoned. Ret e oa din dibab, ha dibabet em boa en deiz-se. Ar bed a c’hoarzh e ouzhin.

**T. Gwilhmod**

## Lampedusa pe sevenidigezh un diougan

Pa voe gouezet gant an dud e oa deuet a-benn darsavidi Tuniz da rediañ Ben Ali, Prezidant Tunizia da reiñ e zilez, e voe skrivet ha diskleriet laouen er meziennou gall hag europat dre vras, e oa bet trec’h an demokratiezh er vrose, seul-vui ma hañvale ar c’hoant demokratiezh-se bezañ tonket da c’hounit, evel an tan en ur stlejad poultr, broioù muslimat all : Libia, Egipt, Yemen, ha pelloc’h broioù ar Reter-Nesañ. Hogen pa voe gwelet un toullad bigi o tilestrañ e Lampedusa, an enezenn-se eus kreisteiz Italia, miliadoù a Duniziz hag un nebeut Libianed en o zouez, a dec’he diouzh o bro, e chomas hogos mut an hevelep meziennou-se, re Vro-C’hall dreist-holl<sup>18</sup>. Koulskoude, e voe ur gannadez c’hall, Chantal Brunel, eus an UMP, kalonekoc’h eget ar re all, pe dalc’het nebeutoc’h gant ar *politically correct*, evit lavarout “Lakaomp anezho en-dro er bigi”, ha kerkent e voe lakaet an hu warni gant ar meziennou. “*Ar wirionez en deus lavaret, bez’ e tle bezañ andishaet*” a gane gwechall ar c’haner gall Guy Béart.

Evidon-me e save memestra ur gudenn, rebech a rae an Dunizianed d’o frezidant, da izili e diegezh, ha da uhelidi ar renad Ben Ali, da vezañ deuet pinvidik diwar goust ar bobl dunizian, ha bremañ ma oa diskaret ar renad brein-se, ha ma c’hellfe ar vuhez

<sup>18</sup> D’ar 6 a viz Ebrel, en ur pennad embannet war *le Figaro.fr*, e lavare un enbroad tunizian aterset, Tarek 20 vloaz : “Edomp 150 war ur vag graet evit 60. E kerzh an treug da Lampedusa eo bet taolet 12 plac’h er mor”. Ker e koust ar plasou evit an Eldorado! Souezhus n’eo ket bet adkemeret ar c’heloù gant mezienn all ebet ; retvez ar *politically correct*, a glask diskouez an dec’hidi evit ar reuzidi n’int ket dre ret, a verke *Valeurs Actuelles*, niv. 3881, 14 a viz Ebrel 2011, o restañ komzoù L. Aliot eus an FN.

bezañ gwelloc’h hiviziken, gant pinvidigezhioù rannet reizhoc’h etre an holl Dunizianed, e tec’he ar re-mañ a-vil-vern etrezek Europa. Ersaviñ a rae an dud-se evel pa vijent bet en un toull-bac’h, gant Ben Ali da doullbac’her a vire outo da vont da Europa. Badaouet an toullbac’her, n’o devoa c’hoant nemet skarzhañ kuit ar pellañ ar gwellañ diouzh ar gaouidell ma oant serret enni, evel ma rafe prizonidi war dec’h. Klevet hon eus ar meziennou o tisplegañ deomp n’eus ket a zazont evit ar re yaouank e Tunizia, n’eus ket a labour evito. Koulskoude kalz a dud a vev diwar an touristerezh, pet a wech n’em eus ket gwelet ur veaj da Dunizia evit 2 zen, profet gant kenwerzhourion Vlaen da goulz o degad kenwerzhel. N’eo ket ur skouer vat marteze, hogen degas a rae memestra labour da galz a dud. Lamit an touristerezh e Breizh hag ho pezo diskeladegoù.

Dilestradegoù Lampedusa a reas din soñjal ivez e labourva dilhaderezh Gwenvenez-Penfaw, e-men e labourva va gwreg ugent vloaz ’zo. Ouzhpenn 200 micherourez a labour e ennañ. Gant digoradur an harzoù ha kevezerezh priz izel an dorn-labour e broioù ’zo, en Azia pe e Norzhafrika, e voe dilec’hiet al labourva da Dunizia. Da gentañ un isstal, un iskevredad<sup>19</sup>, evit ur 30 bennak a vicherourez evit un taol arnod, da c’houde e voe 60, 100, hag a-benn ar fin ez eo aet pep tra da Dunizia, ha serret pep tra e Gwenvenez evel-just. Setu perak e rae din meveriañ<sup>20</sup> darvoudoù Tunizia. Darev e oad da zegemer an dec’hidi-se e Kornogeuropa daoust ma ne oa post labour ebet da reiñ dezho peogwir hor boa endev milionoù a dud dilabour du-mañ, hag an holl c’houarnamantoù tost da ziskleriañ freuz-stal gant dleoù dreist-gonvor.

<sup>19</sup> Isstal, iskevredad : *succursale*.

<sup>20</sup> Meveriañ : *méditer*.



## Kamp ar Sent

Kendegouezh pe rakskiant<sup>21</sup>, ez eo d'an hevelep mare gant darvoudoù Tunizia, Libia, Egypt... maz eo bet adembannet gant ti-embann Robert Laffont, romant ar skrivagner gall Jean Raspail : *Le Camp des Saints*. Embannet evit ar wech kentañ e 1973, e prenis al levr-se un nebeut bloavezhioù da c'houde pa voe adembannet e stumm ul levr-godell. Lavaret em eus e oa ur romant, hogen ur romant-diouganañ e oa e gwirionez. War-dro ar bloavezhioù 2040/50, e c'hoarvez darvoudoù al levr. Emañ un naonegezh oc'h ober e reuz e Norzh an Indez, pezh a vroud miliadoù ha miliadoù a dud da zeredek d'ar gêr vras, Calcutta. Azezet e burev Koñsul Belgia e Calcutta, un dek bennak a dud : en o zouez un eskob katolik, ur mezeg misioner, un eorizhour laik, ur prederour dizoue, ur skrivagner katolik renaviat kanttroet d'ar Voudaegezh, holl tud wenn bodet evit goulenñ e vefe graet un dra bennak evit an holl dud varnaoniet-se. Gouzañv a reont rebechoù ar C'hoñsul : "Dihentet hoc'h eus ar garitez kristen – 40.000 bugel indian advabet e-kerzh pemp bloaz evit Belgia nemetken – louzet ha pismiget dizehan hoc'h eus ar bed kornogat e spered an Indeziz, war un dro gant diskouez dezho ez eo Europa ar vro ma red enni al laezh hag ar mel, en ur ger baradoz an douar. Tud diskiant ez oc'h ! Met petra a fell d'an dud-se, a zichekas ar C'hoñsul, m'o c'hasfec'h d'ar baradoz faltaziek-se ? N'eo ket se a fell deoc'h memestra ?" Geo ! Laosket e oa ar ger : mont d'ar baradoz ! E porzh Calcutta e oa daou vordreizher kozh, oc'h ober o zalaroù, debret gant ar mergl, an *India Star* hag ar *Calcutta Star*. Arsailhet e vezont gant an engroez evit m'o c'hasfec'h d'ar baradoz. Degadoù a vigi all a ziwask an hevelep tonkad evit d'an engroez en alfo mont d'ar baradoz eorizhek. Dastumet e vez bravigoù aour ar merc'hed evit paeañ ar mazout ret evit ar veaj hag ar sac'hadoù riz evit magañ an dud, hag e loc'h diouzh Calcutta kant bag gant ur milion a dud en o bourzh.

Ur milion a dud, un niver spontus eo ! Met petra, a lavarit-hu, en deus ar milion-se da welout gant bigi bihan o tilestrañ enbroidi e Lampedusa, netra d'ar c'hentañ sell, hogen abaoe bloavezhioù eo e pad an troidelloù-se. Er C'hwec'hkogn ez eus ur pemp pe c'hwec'h milion a Vaghrebiz, pe muioc'h c'hoazh, ha ne oant ket eno e 1950/60, lakaomp. Penaos ez int deuet ? Tamm ha tamm, gant bennozhañ politikereion zoken : gant Giscard d'Estaing, bet prezidant gall, o kuzuliañ da rener Citroën da enfredañ micherourion varokat evit ober da briz an dorn-labour digreskiñ (bet restet gant Raymond Bourguine rener ha diazezer ar sizhunieg Valeurs Actuelles), Jacques Chirac, bet prezidant gall ivez, o fuloriñ war-lerc'h trouz ha c'hwezh flaer degaset gant an enbroidi, hogen oc'h ober dont miliadoù a Valianed, da bep hini meur a wreg alies ha bugale niverus, evit dastum ar

<sup>21</sup> Rakskiant : *préséance*.

poubellennoù e Paris, F. Mitterrand, bet prezidant c'hoazh, o lavarout d'an enbroidi e oant amañ evel en o bro. Touellet on bet holl evel ma tiskoueze Luigi Galvani, fizikour italian (1737-1798) penaos ur ran splujet a-greiz-holl en dour bev a zilamme kerkent er-maez eus an dour, endra m'en em leze da vezañ poazhet ez vev unan all o neuñvial en un dour kaset goustad da virviñ.

Evel-se, an dud wenn eus Europa e plas ar raned, leun a vorc'hed, gant ar meziennoù lodek o ren ar bal, a vez diskouezet gant Jean Raspail, tud wenn o c'houlenn pardon evit kement tra bet graet ganto, mat pe fall, pe gant lod eus o hendadoù. N'emañ ket kont evel-se gant pobloù all (el levr) : Egiptiz na fell ket dezho e tremenfe lestraz an enbroidi indian dre ganol Suez, a gas ul lestr-tarzh e mulgul ar Mor-Ruz evit stankañ an hent dezhañ. Republik Suafrika bepred etre daouarn ar re wenn el levr, hag a c'hellfe degemer an enbroidi-se, gant he ziriadoù divent a ra evel an Egiptiz, o tiskouez he youl da gas d'ar strad kement bag a glaskfe dilestrañ he sammad enbroidi. Kunujennet e vez evel-just gant holl veziennoù ha gouarnamantoù ar bed kornogat. Hag *Armada ar Ganga* a gendalc'h gant he hent a-hed aodoù kornog Afrika... ha netra ne vez klasket ober da vat gant gouarnamantoù Europa evit herzel outi, tremen a ra dre strizh-mor Djebel-Tarik (Gibraltar) da vont er Mor Kreizdouar, ha tizhout penn he hent : kreisteiz Bro-C'hall, aodoù Provañs.

Ar milion a enbroidi-se o tilestrañ war-un-dro en dije dleet c'hoari arnod Galvani, ersav ar ran splujet en dour berv, hogen tamm ebet, hini degouezh ar ran bet en em lezet poazhañ tamm-ha-tamm ne lavaran ket ! Tec'hout a ra ar boblañs etrezek an Norzh evel ma rafe dirak ur wir arme enebour oc'h aloubiñ ar vro, gant tankoù, kanolioù ha kirri-nij mindrailher. Hag an arme c'hall, kaset evit herzel ouzh dilestradeg *Armada ar Ganga* a nac'h sentiñ ouzh an urzhioù, ober he labour. Pistri ar geuziadezh<sup>22</sup> evit kement tra fall c'hoarvezet er bed, atebegzh asantet gant an dud wenn evit kement naonegezh, brezel, kevergoll a dizh kevandirioù a-bezh, bet ensilet e speredoù an dud e-pad hanter-kant vloaz gant ar c'helaouennoù, ar skingomz, ar skinwel, ar fiñvskeudennerezh, ar skol, an Iliz, en deus degaset er boblañs an dizdeltuerezh<sup>23</sup> hag an emgablusidigezh<sup>24</sup> gwitibunet<sup>25</sup>. Un ugentvet hepken a C'halianed andireadus<sup>26</sup>, kaset buan da get gant o breudeur a ouenn, tremenet d'an enebour, a harzo dre an armoù ouzh maread an alouberion sañset dizarm, hogen o niver a oa o arm.

Da raklavar adembannadur e levr en deus skrivet Jean Raspail un destenn talbennet gantañ *Big Other*,

<sup>22</sup> Keuziadezh : *repentance*.

<sup>23</sup> Dizdeltuerezh : *démoralisation*.

<sup>24</sup> Emgablusidigezh : *autoculpabilisation*.

<sup>25</sup> Gwitibunet : *généralisé*.

<sup>26</sup> Andireadus : *irréductible*.

ma lavar enni en deus fellet dezhañ, ur wech diwezhañ, diskleriañ fraezh an traoù evel m'emaint. Pa voe gouezet gantañ e oa bet skoet a-youl-kaer reier Boulouris, e-pad an noz d'an 21 a viz C'hwevrer 2001, un hanter-kant metr diouzh an ti e-lec'h en devoa skrivet e romant, gant ur c'harglestr kozh dizanv, debret gant ar mergl, sammet gant ur miliad a enbroidi Gurd, e welas eno evel ur sin. Awenet e oa bet gant Ragevezh-Doue da skrivañ e levr, evit klask dibikouzañ pobloù Europa : bleinet ma oant gant renerion dall o c'hase en argoll, gant lezennoù fall diskouezet evel gounidoù meur evito (sioc'hanerezh, pilulenn hilastaliñ ha revelezh digabestret o tegas digresk drastus an dudegezh ha

distruj an tiegezhioù...) pa ne oant nemet diougan o zremenvan, keñveriet gant tudegezh an Trede-bed o lieskementiñ. Ha, pezh a zo kaeroc'h, e farded lezennoù all evit minwalañ nep piv bennak, spisweloc'h eget ar re all, a glaske o gouzaviñ.

Hon tonkad eo, a verk Jean Raspail, war bajenn 4 golo e levr, a vez kontet el levr-mañ, hon diskiantegezh hag hon darbennegezh<sup>27</sup> d'ar pezh emañ o vont d'hol loezañ<sup>28</sup>.

**Yann MIKAEL**

<sup>27</sup> Darbennegezh : *acquiescement*.

<sup>28</sup> Loezañ : *dissoudre*.

## An Templ ez on

*“Spered eo Doue, hag ar re a azeul anezhañ o deus d’e azeuliñ e spered hag e gwirionez”* Yann 4, 24.

Ne dalvez ket kement-mañ ez eo ret dismantrañ hon ilizoù, hor chapelioù, dilezel kement stumm diavaez a c'houloc'h<sup>29</sup>. Hogen komzoù-se Jezuz a zesk deomp ne c'hoarvez ket ar gouloc'h diles<sup>30</sup> eus arvez diavaez al lidoù, met kefleuniet e vez *“e spered hag e gwirionez”* e kalon ar feizidi, aze, evel ma lavar St Eosten *“Emañ Doue muioc'h nesaoniad<sup>31</sup> din-me eget me va-unan”*. Rak abaoe ar C'hrist, ez eo hiviziken an den tempel Doue. Haeret e vez gant St Paol, e-barzh 1 Kor. 4, 16-17 : *“Na ouezit ket ez oc'h Tempel Doue hag en deus Spered Doue e annez ennoc'h ?”* En devoud, dre ar vadeziant ez omp al lec'h ma vez e annez.

Evel-se e tle hor c'horf bezañ skañvaet diouzh kement stlabez ha koc'hien, dre ma tle bezañ al lec'h ma kej gant Doue, un templ direbech, un ti a bedenn. Evel-se ne zle ket hor c'halon bezañ ur santual goullo, drastet, diarver, o reiñ goudor d'an idoloù hepken, ha gwashoc'h c'hoazh d'an dic'hoanag ha d'e c'houloc'h. Hogen n'emañ ket hor c'horf e-unan-penn. Maen ur savadur ez eo. War korf ar C'hrist dasorc'het ez omp bet adeiladet. Emañ-Eñv, ar maen-korn, ar maen-diazev. Neuze korf ar C'hrist n'eo ket, Eñv-ivez, e-unan-penn, rak enkorfet e vez en holl vadezidi, ar feizidi. Bez' ez eo ar c'horf meur disgwel, stummet gant an holl Gristenion, unanet outañ.

Korf bev ar C'hrist ez eo an Iliz. An Iliz ez eo an izili ez omp-ni, ent-kenaozek<sup>32</sup>, kevreet ouzh ar Penn. An Iliz ez eo ar santualoù ez eus ac'hanomp, gronnet en-

<sup>29</sup> Goulloc'h : *culte*.

<sup>30</sup> Diles : *authentique*.

<sup>31</sup> Nesaoniad : *intime*.

<sup>32</sup> Ent-kenaozek : *organiquement*.

dro d'an iliz-veur ez eo Jezuz-Krist. An templ santel ez eo ar C'hrist, ez eo an Iliz, ez eo pep hini ac'hanomp. Ha pa vez lavaret gant Jezuz d'ar vaouez a Samaria ez eo ret *“azeuliñ e spered hag e gwirionez”*, en em ziskouez e-unan evel Templ bev nemetañ Doue, evel lec'h peurglok e ensezidigezh en istor an denion. E kreiz an Istor, abaoe ar C'heddenadur<sup>33</sup>, en em gav Korf Jezuz, dismantret da gentañ maen ouzh maen, taol ouzh taol, hogen adc'hraet d'an trede deiz.

Ouzh an Templ en em hennad<sup>34</sup> Jezuz : *“Distrujit anezhañ”* a lavaro d'ar Yuzevion. E varv e vo. *“hag a-benn tri devezh ez adsavin anezhañ”*. Bez' e vo e zasorc'hidigezh. Ha St Yann da resizañ ez eo an Templ-se e Gorf. Evit an abostol muiañ-karet, ez eo ar c'horf-mañ hiviziken lec'h an azeulerezh hag ar gejadenn gant Doue... N'eus enta nemet ur santual hepken, korf an Aotrou, ar C'horf bev adsavet adouez ar re varv. Hogen adlavaromp an dra-se, ar C'horf-mañ, korf an holl vadezidi o stummañ an Iliz, ar C'horf marzhus-mañ ma vez Jezuz ar Penn anezhañ, a zo Templ nevez Doue war an douar. Bepred nevez dre maz eo bev. Neuze e veizer gwelloc'h respont Jezuz d'ar Samariadez. Ne vez mui keal eus templ Jeruzalem, nag eus hini ar Menez Garizim<sup>35</sup>, rak lec'h brientek kejadenn an den gant Doue n'eo ket ul lec'h ken. N'eo mui an iliz-kador, an iliz-parrez, ar chapel, ar mogerioù mein pe marmor. Unan bennak eo.

**Youenn Troal**

<sup>33</sup> Keddenadur : *incarnation*.

<sup>34</sup> Hennadiñ : *identifier*.

<sup>35</sup> Templ ar Samariz, bet distrujet gant Yann Hirkam e 129 a-raok HS.

**Tro Breizh 2011**- Izili eus Emglev an Tiegezhioù a gemero perzh en « Tro Breizh » ar bloaz-mañ, etre Landreger ha Sant Brieg. Loc'hañ a raio ar birc'hirined d'al lun kentañ a viz Eost evit erruout d'ar sadorn c'hwec'h. Un doare-mat d'en em gavout ha da bediñ... 'gant an treid' !

**Bro Japan** - Gant ar pezh a c'hoarvez er mare mañ er Japan tro-dro da greizenn derc'hanel Fukushima, e vezer krog d'en em soñjal dre ar bed a-bezh war dañjerioù an energiezh-se. E Penn-ar-Bed ez pevar lestr-spluj a zo a fuc'hellou, kement ha 2000 gwech Hiroshima o c'halloudegezh-distrujañ.

**Toull lastez Kreiz Breizh** - Ne vo ket a doull lastez e Ploure er Mor-Bihan. Divizet eo bet chom a-sav gant ar raktres da heul eneberezh ar boblañs.

**Montroulez** – emañ Skol Vreizh o werzhañ ul levr gant **Fañch Morvannou** : « Treiñ e brezhoneg » 18 euro. Bez ez eus anezhañ un dastumad testennoù bet troet gantañ diwar ar galleg, d'ar mare ma oa o reiñ kentelioù-treiñ e skol-veur Vrest. En o zouez e kaver kalz a destennoù a denn, doare pe zoare, d'ar relijion gatolik, **testennoù a-bouez diwar bluenn skrivagnerien vrudet** evel Erasmus, Bossuet, La Bruyère, Chateaubriant, Bernanos, Newman..., ha re all war danvez Breizh evel Cambry, Renan, Souvestr, Doupouy, Helias, Guy Coq... Ur gwir blijadur ez eo evit al lenner : ral a wech ez eus ezhomm da sellout ouzh an destenn c'hallek, pezh a verk ez eo troet mat an testennoù. An notennoù e traoñ ar pajennoù a ro troiennoù all a-wechoù, pe a zispleg ar perag eus an dibaboù a zo bet graet, o tegas alies d'ar studieren displegadennoù ha gerioù war ar relijion, paz eo estren dezho ar stuzegezh-se a-benn bremañ peurluviañ. Gant ar skritur « etrerannyezhel » ez eo moulet al levr avat.

**Lesneven** – E miz du e oa bet embannet ul levr gant **Ti ar Vro Lesneven** : « *Kanit 'ta tudou* », un dibab a ganaouennoù anavezet, gant div bladenn CD da reiñ da glevout pep hini anezho. Notennoù a gaver da heul pep kanaouenn e galleg. Koulskoude n'eus troidigezh ebet e galleg eus komzoù ar c'hanaouennoù. Un dra all, deuet mat ivez : da heul ar c'hanaouennoù-se ez eus un nebeut kantikoù anavezet : pevarzek. 88 pajenn, 18 €, evit prenañ : 02.98.83.30.41.

**Lesneven** –Berzh a vez graet kement ha kement gant "*Les Bretonnismes*", levr diwezhañ **Herve Lossec**, embannet gant **Skol-Vreizh**. Gwerzhet ez eus bet ouzhpenn 50.000 skouerenn da vare Nedeleg. 100.000 skouerenn a zo bet tennet abaoe ! Den ebet ne oa en gortoz kement-se. Met n'eo ket souezh, pa soñjer, rak ur prof eeun ha marc'had mat, war un danvez 'fentus', mat da hilligañ spered an dud. War **TF1** ha **France 3 Iroise** ez eus bet kelaouadennoù da

vrudañ muioc'h c'hoazh al levrig. Evel-se ez eus bet milionoù a dud o welout *plouked* o lonkañ banneoù en un davarn leun a dud kozh o c'hoari domino hag o chaokat galleg divalav. Displegañ a reer ar berzh-se o tisklêriañ sirius deomp e tiskouez emañ ar Vretoned oc'h ober goap outo o-unan (*autodérision*) hag ez eo un doare da gas kuit merzhad an tru (« *ils se décomplexent* »), ar vezh a-benn ar fin, eus ur yezh na berc'hennont mui hag eus ur yezh all na berc'hennont ket c'hoazh. **Paolig Kombot**, rener Skol Vreizh a ziskleir « *ez eo un doare da gomz galleg n'eo ket falloc'h eget un all* ». Galleg saout a vefe kenkouz ha galleg ar saloñsoù ? Biskoazh ! Ha **Louis Elegoet**, saver « *Istor Breizh* » TES a vourr oc'h implij an troioù-lavar-se dre ma reont dave d'ur mare a zo bet, doare an dud da gaozeal n'eus ket keit 'se, e Breizh izel, a gav plijadurus. Boñ. Gant ar bandennoù treset « *Les Termaji chez les Penn sardin* » e oa bet graet berzh bras ivez, ugent vloaz 'zo. Plijadur vras a zegas seurt lennegezh, sklaer eo, ha ma vez digemplezhet an dud e-keñver o c'halleg saout, n'eo ket sur en em lakaint da zeskiñ ervat ar yezh pe d'he c'homz en-dro... Memestra, klask komz galleg mat ha brezhoneg mat 'zo d'ober, anez bezañ lakaet da *bplouc* gant an dud, n'eo ket ? Da belec'h e kas seurt abuzerezh, nemet da bakañ brud ha da rastellat ur gwenneg bennak ? Ha dreist-holl, daoust hag eñ e c'heller diskouez pep tra evel-se hep tamm elevez (*pudeur*) ebet ? Ne gaver ket el levr-se an doujañs evit ar rummadoù a vretoned o deus bet da c'houzañv gant ar galleg kaoc'h-saout-se a ziskouezer deomp el levr-se evel ur binvidigezh !

**Kastellin** – Diskennet eo eus 7% niver ar venajerien e Penn-ar-Bed e-kerzh an tri bloaz tremenet. Sed ar pezh a oa bet embannet e penn kentañ miz Genver da geñver Forom micherioù al labour-douar e Kastellin. Ne vez ket dedennet kement a dud ken gant al labour-douar ha diaes eo dezhañ kavout gopriddi zoken.

**Pont 'n Abad** – a-benn ar fin ez eo bet diskoulmet afer Ospital Pont 'n Abad a oa o vont da serriñ da vat, sammnet gant un dlee pounner-dreist. Adalek bremañ eo **Urzh leanezed Sant Tomaz Ar Gernevez** a gemer e karg an ospital hag a labouro gant ospitalioù all Bro-Gernev.

**Plougourvest** – « *Le Christ s'est arrêté à Rome* », setu anv levr diwezhañ **Jean Rohou**, *skrivagner "Fils de ploucs"*. Ar wech-mañ ez eo ar relijion danvez al levr. Hervezañ ez eo re stag an Iliz, ar Vatikan, ouzh al lidoù, ouzh ar sakramantoù pe c'hoazh ouzh an ensavadurioù. Re vongoalek (« *trop dogmatique* ») ez eo an Iliz evitañ... E-barzh Al Lanv miz kerzu (niv. 123, p. 25) e skriv Jean-François Blanchard diwar e benn ha **Mona Ouzouf**,

merc'h **Yann Sohier**, ec'h ijinont « *ur bed humanist, skiantek ha dizoue* ». Missa est. P'emañ dizoue n'hell ket Jean Rohou kompren tra ebet diwar-benn an Iliz. Ober prosez d'an Iliz evel-se 'zo moustrañ war an dud simpl hag a sell ouzh an Iliz, gant gwir abeg, evel an tour-tan war ar mor dirollet.

**Plougerne** – « Pezh diwezhañ **Ar Vro Bagan**, « *Divroañ* », a gont divroadegoù ar Vretoned etrezek mengleuzioù Trelaze e-kichen Angers, Bro Arc'hantina, Kanada, Kreisteiz Bro-C'hall, ha Pariz. N'o deus ket kavet bep tro an eürusted edont o klask. E-keit-se e teu estrenien da glask labour e Breizh, lod all da glask repu dirak ar brezelioù hag *ar faskourien*. Lod eus ar Vretoned a zistro d'o bro, da zont war o leve... Lod all abalamour ez eus deut skiant dezho e oant Bretoned (dre labour Alan Stivell ha reoù all...). Dont a ra estrenien da Vreizh e-giz e pep lec'h en Europa. A bep bro. Klevet o deus anv eus Europa, an Eldorado nevez. Da echuiñ ar pezh e weler tri istor : Bretoned a ro bod da dud diavaez-bro a oa o kuzhat : repuidi Bro-Euskadi, Sakinat Amiralieva hag he merc'h Patimat ha labourerien ar Mali e Montforzh e-kichen Roazhon. Evel Antigon e Bro-Hellaz eo bet savet ar Vretoned a-enep "lezenn ar Roue", evit difenn tud divro ha dibaper » eme AVB. Lezenn ar Roue ? Lezenn ar Republik eo ez eo ! Tud dibaper, 'zo tud er-maez lezenn, n'eo ket ?

Diouzh e du, **Padrig an Habask** (Al Lanv 123 p. 28) a gont e vez diskouezet er pezh « levezon ar relijion war vuhez an dud, an Iliz dre vras mirour o koll he c'hrog tamm-ha-tamm », ha pelloc'h « Gant ar sikour denel en estrenvro e tigor hentoù nevez d'an divroañ a youl vat, mont war ziazezoù denel ha n'eo ket mui relijiel da sikour an nesañ ». An Dengarouriezh (*l'Humanisme*) a gemer lec'h ar feiz kristen e spered ar Vretoned. Netra a nevez. Ar meni *Dengarouriezh* kleizelour-se *politically correct* penn-da-benn a zo gouleviet a bell 'zo gant ar skol, an holl meziennoù bras, hag ar braz eus ar veleien 'war-an-a-raok' abaoe brizhdispac'h 68.

Met ne seblant ket ar pezh - n'ouzon ket, n'on ket aet da welout - ober anv eus ar c'hudennoù a savas e Breizh diwar enbroerezh a-gozh Gallaoued war hon tiriad : enteuzadur hor bro er bloc'had gall, koll hor frankizioù, diskar ar yezh hag hon armerzh. Ne seblant ket ar pezh ober anv eus ar c'hudennoù a sav

er mare-mañ gant niver ar Vuzulmiz hag o paotat er vro, karterioù a-bezh dindan o dalc'h, hag a sav moskeennoù bras e Gwened hag en Naoned. Ne seblant ket ar pezh ober anv eus dazont hor broadelezh en ur Vreizh *metisset*. Ni eo an dud divro en hor bro, ha dibaper, pa vez nac'het ouzhimp hor broadelezh dre al lezennoù... ha dre ur gealiadurezh kleizelour c'hwegonteizhat kaset war-raok e diabarzh emsav ar brezhoneg e-unan.

**Pakistan** : Drouklazhet eo bet Shahbaz Bhatti, mavdiern pakistanat evit ar minorelezhioù relijiel, d'an 2 a viz C'hwevrer en Islamabad, gant tud dizanv o deus toullet-didoullet e garr gant boledoù. Bez' e stourme ar C'hatolig-mañ evit ma vefe lamet ar boan a varv evit barrletadenn hag evit difenn ar vinorelezh kristen. An trakt o arc'hañ ar gwalldaol, sinet gant ar rouedad taliban *Therik-i-Taliban-Punjab*, a verke e oa bet lazhet dre ma oa ur C'hristen, un difeizad, ur barrletaer, hag a drugarez Allah ez aio d'an ifern kement ezel eus ar C'hengor evit adwelout lezenn ar barrletad.

**Kemenn** : Savet eo bet, abaoe miz Genver 2011 ur blog nevez e brezhoneg : **Bro Santel**. Pal al lec'hienn-mañ a zo reiñ tro d'ar Vrezhoneg da anavezout gwelloc'h o glad relijiel, en o yezh dezho. E brezhoneg penn-da-benn eo Bro Santel. Klask a raio embann bep sizhun pedennoù ha kantikoù, testennoù kozh a denno d'ar feiz kristen, kelaouiñ an dud diwar-benn embannerezh levrioù relijiel e brezhoneg, hag e roio ivez a-wechoù keleier-berr a c'hello sachañ evezh ar gristenion e Breizh.  
<http://bro-santel.blogspot.com/>

**Ul lenner a skriv deomp** : Kaset em eus da RCF-Lyon (radio kristen sañset... ) ar c'hemenn-mañ : "Souezhet on bet o klevout Isabelle Alonso, kouviet gant an animatourez Elise Fisher, da zont ouzh ar mikro evit ul levr bennak skrivet ganti. Rebechet em eus da RCF, ur gouviadenn seurt-se, pand eo Isabelle Alonso unan bennak a skop war hor Pab hag hon Iliz, bemdez-Doue er mediaoù gall. Meneget ganin dezho o deus desket, bleizi zo, begeliat gant an deñved evit tostaat outo, kregiñ enno hag o lonkañ kriz, krak-ha-krenn !" Resevet em eus digant RCF/Lyon, ar respont-mañ : "Trugarez evit ho kemenn". Ha setu tout ! ??? *Renaod LORCY*

#### **Mererezh :**

13 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (16€ er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://pagesperso-orange.fr/kannadig/> (*Notit eo bet kemmet chomlec'h lec'hienn EAT-IMBOURC'H*)

#### **Skridaozerezh :**

Ar pennadoù a zo da gas da : [jean-mariemichel@neuf.fr](mailto:jean-mariemichel@neuf.fr) , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X